

An hent laeret

A-raok kregiñ ganti

Gortozet 'm eus pell a-raok dispakañ an afer. An afer ? Ur seurt "Lakaet da zianket" eo en ur mod. Met n'eo ket bet ret goulenn sikour digant Jack Malone hag e skipailh. Me 'oar ar pezh a zo bet c'hoarvezet ha gouest on-me da zisplegañ an traoù.

Eus petra ez eus kaoz amañ ?

Eus brezelioù ur soudard aet d'an arme kerkent ha tizhet e driwec'h vloaz gantañ, fellout a rae dezhañ mont da bell vro evit sikour ar pobloù gwasket.

E-pad ma oa ar soudard 'tu bennak en Afrika e teuas ur julod er vro, ur sacher d'e du anezhañ.

Meur a vloaz goude eo aet ar julod diwar wel trumm, hep lavarout kenavo da zen, hep lezel an disterañ gerig war e lerc'h. Un dec'hadenn eo ? Pe ur gwallzarvoud ? Pe ur skrapadenn ? Pe un dra bennak all ?

Staget eo an archerien d'ober un enklask, disoc'h ebet. Fiziet eo bet an afer en enepspierezh war a lavarer.

Ne felle ket din reiñ da c'houzout d'an holl ar pezh a zo bet c'hoarvezet, un afer brevez e oa da'm meno.

Bremañ n'on ket evit delc'her war ma zeod ken, war ma fluenn pa lavarin mat. Forzh penaos ne vo lennet ar pajennadoù da heul nemet gant nebeut a dud, gant ar re a oar lenn, ar re-se a zo gouest da devel.

Ouzhpenn-se ez eus bet treuzwisket anvioù-lec'h zo ganin ha ne ran nemet gant anv-bihan an dud, pe gant ul lesanv.

Evit kompren mat ar perag hag ar penaoz eo dav dont endro d'ur mare zo bet, deomp da dri-ugent vloaz a-raok.

Lociz

Dre zu-mañ e vez roet an anv “richer” d'un draonienn a sav al lanv enni, da lavaret eo d'un aber.

Richer Kêrgozh ! Kreiz ar bed e oa evit ar paotrig ma oan, ha kreiz ar bed eo atav evit an den louet e vlev a zo ac'hanon bremañ.

Kêrgozh, ur gêr vihan savet er grennamzer e penn an aber. Kêrgozh, ul liamm etre ar mor hag ar maezioù. N'eus ket keit-se e kase al lanv, betek Kêrgozh, bigi peurgarget gant traezh, pe gant maerl. Diskarget e vezent diouzhtu a-benn mont kuit pa veze dour dindan o c'hein c'hoazh.

*Ar porzh, leuniet a zour sall gant al lanv,
Pe dizolo al lec'hideg, c'hwezhoù kreñv o sevel,
Branskellerezh un dundee o tiskargañ traezh,
Adskeud tour an iliz war gorre plaen an dour.
Eñvorennoù ur bugaleaj tener.*

Riblet eo richer Kêrgozh gant douaroù Keravel diouzh tu an hanternoz ha gant douaroù Keruhel diouzh tu ar c'hreisteiz.

*Diwar un uhelenn e welen ar ribl all,
Paludoù didermen ha rozioù Keruhel,
Rozioù goloet-stank a goadoù glas teñval,
Ur santad a gevrin a save diwarno,
Harzoù didreuzus ur vro dianav.*

Un dachenn c'hoari dispar e oa ribl hanternoz ar richer, en tu all en em lede ur vro gevrinus ha boemus, ne c'hallen nemet arvestiñ outi.

E giz-se e oa an traoù betek ma erruas Loeiz em buhez, 9 bloaz e oan hag eñ ivez.

E ti-skol Kêrgozh eo em boa graet anaoudegezh gantañ, er bloaz-se e oa un dremm nevez em c'hlas, Loeiz e oa.

Dedennet e oan bet diouzhtu gant ar skoliad nevez, disheñvel e oa diouzh ar re all, ne gemere ket perzh er cholori a save er c'hlas a-wechoù, sioul e chome, e-giz ma vefe bet e spered e lec'h all.

Er porzh-c'hoari em boa goulennet outañ eus pelec'h e teue ha, tamm-ha-tamm, em boa klevet titouroù diwar e benn.

Nevez zo e oa deuet tud Loeiz da zalc'her ur stal vihan e Kêrgozh, ur stal ma veze gwerzhet enni frouezh ha legumaj. A-raok-se e oant o vevañ en un ti-feurm war douar kumun Keruhel, ur feurm anvet An Treizh.

Ur gourenez eo kumun Keruhel evit gwir, ur gourenez digompez-kaer ha koadek-stank ar rozioù anezhi. Er c'hreisteiz e oa un treizh gwechall, un treizh evit mont en tu all d'ar Stêr-Aon. Eno eo en em led douaroù An Treizh.

Ret e oa bet da dud Loeiz mont kuit eus An Treizh evit gounit o zamm bara e lec'h all, rak ne c'halle ket div familh bevañ diwar ur feurm vihan, dalc'het e oa An Treizh gant breur henañ tad Loeiz, alies e c'hoarveze an dra-se war ar maez.

Buan a-walc'h hor boa santet e oamp kar an eil d'egile ha fellout a rae din kinnig ma domani da Loeiz.

Goude ar skol, debret buan adverenn ganeomp er gêr, en em gavemp war kaeoù Kêrgozh. Peurliesañ e yaemp da vale a-hed ar richer, a-wechoù war an aod, a-wechoù gant ar gwenodennoù.

« Ur stêr a zo ivez en tu all da Geruhel, ur stêr vras, » en doa lavaret Loeiz din. « Dav e vo dit dont d'he gwelout. »

Hent An Treizh

Bep Sul e yae Loeiz d'An Treizh evit ober ur weladenn d'e dud-kozh ha d'e gendirvi. Un tamm re bell diouzh Kêrgozh e oa evit mont war droad, e-barzh karr-samm an tad e pigne ar familh a-bezh.

A-wechoù e c'houlenne Loeiz bezañ lezet war an uhelenn e penn an hent kozh, un hent meinnet, an hent nemetañ a gase d'An Treizh a-raok ma vije bet savet un hent nevez, un hent ledanoc'h ha teret. Boas e oa an dud war droad da vont gant an hent kozh, un hent boutin e oa. Darempredet e veze atav gant an dud a blijed dezho bale siouliek en natur.

Dre ma oa brav an amzer e oamp bet lezet Loeiz ha me e penn an hent kozh pa oan bet En Treizh evit ar

wech kentañ. Dibenn miz Gwengolo e oa, war-dro 9 eur mintin.

Plaen e oa an hent da gentañ ha riblet gant girzhier uhel. A-benn pemp munut bale e oa pouez-traoñ gantañ ha garzh ebet ken, bro Loeiz en em zispakas en he fezh dirak ma daoulagad. En traoñ e kildroe ur richer vras, diouzh tu an hanternoz, tu Keruhel, e save rozioù serzh goloet a goadoù-med, diouzh tu ar c'hreisteiz e save ur menez goloet e dorioù a wez pin hag a vrug.

« Ar Menez-C'homm eo, » eme Loeiz. « En traoñ e red ar richer vras, ar Stêr-Aon. Uhel eo ar mor, pignat a ra al lanv pell en douaroù. »

Lorc'h a oa e Loeiz o kinnig e vro din.

*Diwar hent An Treizh
Ez eus ur gwel dispar,
En traoñ e tro aber an Aon,
En tu all, a-us Tregarvan,
Etre Argol ha Dineol,
En em zispak ar Menez-C'homm.*

Bamet e oan gant ar gwel dic'hortoz. Sklêrijennet e oa an draonienn ec'hon gant heol ar mintin, ur vro nevez en em zispake dirazon. Er mervent, en tu all d'ar stêr vras, ne oa nemet koadoù gwez pin betek an dremmwel, roud ebet a vezañs Mab-Den.

Un avel-draoñ tanav a zegase frondoù dibar d'hor fronelloù, frondoù gwez pin mesket gant c'hwezh yac'h an dour sall a leunie an draonienn.

E-pad ma oamp o tiskenn etrezek An Treizh e tislege Loeiz an ardremez. Anavezout a rae anv pep park, anv pep

ti-feurm a oa war-hed gwel, anvioù en doa klevet digant e dud-kozh.

E-pad ar bloavezhioù war-lerc'h e vezemp Loeiz ha me o c'haloupat dre ar vro, etre richer Kêrgozh ha Stêr-Aon. Mont a raemp pelloc'h-pellañ diouzh ar gêr, gant ar c'hoant kavout teñzorioù kuzh atav.

*Traoñ ar pradeier beuzet d'ar reverzhi vras,
Klemm ar c'hefeleg-aod war nij dreist ar richer,
Morbaged o klask o boued war al lec'hidieg,
Splujadennoù ar vorvran pa zeu al lanv,
Endro bamus daou baotr bihan o kantren*

An disparti

Un dra all a oa e buhez Loeiz, un dra hag a gomze Loeiz anezhañ alies, un dra hag a verko an hent dezhañ.

Er vro-mañ pa ya ar baotred yaouank d'an arme ez eont d'an arme-vor peurliesañ, met ne oa ket en arme-vor e oa bet Pôtig, unan eus breudeur mamm Loeiz, "soudard en inizi" e oa, da lavaret eo e-barzh "*la coloniale*". Kaset e oa bet da Afrika da gentañ ha da Indez-Sina da c'houde, en Indez-Sina e oa abaoe meur a vloaz.

Dre lizheroù e konte Pôtig penaos e oa an traoù du-hont e penn all ar bed. Boemet e oa Loeiz pa gleve e vamm o lenn an anvioù-lec'h meneget gant tonton Pôtig : Tonkin, Hai Phong, Ha Noi, Hoa Binh, Nam Dinh, Yên Bai, Lao Cai... Ur gaer a vro a skrive Pôtig : an amzer glouar, ar struj fonnus-eston, ar frondoù, al livioù, ar menezioù gouez goloet-stank a goadoù. Kalz stêrioù a zevel diouzh ar menezioù : Song Koi (ar Stêr Ruz), Song Da (ar Stêr Zu), Song Lô,

Song Ma... Dour ar stêrioù a yae da bleg-mor Tonkin dre un delta ec'hon, un delta poblet-stank gant kouerien a veze o labourat diarc'hen er rizegi. Menegiñ a rae Pôtig ivez un hent-houarn a gase eus Hai Phong da Sina, hent-houarn ar Yunnan moarvat.

Div wech ar bloaz e teue ul lizher digant Pôtig. Menegiñ a rae ivez peseurt boued a veze roet d'ar soudarded, boued mat : pesked a bep seurt, kig yar ha kig moc'h, riz, patatez, frouezh ar vro... Ul lodenn win ha butun a veze roet da bep soudard ivez.

Ne skrive Pôtig seurt ebet diwar ar pezh a rae a-hend-all, difennet e oa sur a-walc'h.

Diouzh lizheroù Pôtig e krede Loeiz e oa Indez-Sina ur baradoz.

Soudarded a erruas er vro e 1940. Ne oa ket anezho soudarded "an inizi" o tont en-dro, soudarded all e oa, soudarded deuet da zalc'her ar vro, soudarded gwisket e gris. Trec'het e oa bet an arme c'hall.

Diskredus ha dipitet-bras e oa an dud, dreist-holl ar wazed bet kaset d'an talbenn e-pad ar brezel 14, an nebeud gwazed o doa bet ar chañs da zont en-dro d'ar gêr.

Un nebeud soudarded alaman a oa lojet e Kêrgozh. A-wechoù e vezent gwelet o tennañ a-wenn diwar ar pont, o *mauser* troet war zu ar richer. Difennet-groñs e oa d'ar vugale dastum an tennoù goullo kouezhet war an douar.

Kezeg o doa, savet e oa bet marchosioù evito war ar c'haeoù, kaset e vezent da beuriñ e fenneier Kersivien, gwelloc'h e oa sachañ e skasoù diwar an hent pa dremene ar bagad kezeg.

Kement-se ne cheñche ket kalz buhez krennarded ar vro. Ret e oa deomp mont d'ar skol atav, mont d'ar skolaj

kentoc'h. War ar pemdez e oa lojet Loeiz en ur skolaj ha me en unan all. D'ar Sul en em gavemp an eil gant egile, d'ar Sul hag e-pad an ehanoù skol.

E-keit-se e kendalc'he ar brezel da lakaat freuz ha reuz e lec'h all en Europa hag er Reter-pellañ. Adalek 1940 e oa kroget ar Japaniz da lakaat o c'hrabanoù war Indez-Sina.

Ouzhpenn-se e oa bet savet Stad ar Viêt-Nam a-nevez. Fellout a rae d'ar Viêtnamiz lakaat un termen d'ar galloud trevadennel.

Chalet e oa Loeiz hag e vamm, ne oa mui keloù eus Pôtig, ne ouient ket ar pezh e oa deuet da vezañ. N'eo nemet e miz Gwengolo 1945 e c'helljont gouzout e oa bet tapet Pôtig da brizoniad gant ar Japaniz, hep gouzout ha bev pe marv e oa.

Dedennet e oa Loeiz gant red ar brezel er Reter-pellañ koulz hag en Europa. Ma vije bet un tamm koshoc'h e vije aet d'an arme diouzhtu.

Ret e voe dezhañ gortoz ar bloavezh 1946, tizhet e 18 vloaz gantañ e yeas Loeiz d'an arme.

E dibenn ar bloaz-se ivez e voe laouenaet-bras familh Loeiz gant un dra ha na greded mui gortoz, distro Pôtig d'ar gêr.

Adkavet e oa bet Pôtig en ur c'hamp prizonidi dalc'het gant ar Japaniz. Fall e oa stad ar brizonidi a oa manet bev, klañv e oant hag hanter-vaget. Tapet en doa Pôtig ar vrec'h-zu, a vez graet tifuz anezhi ivez. Louzaouet e oa bet gant an Amerikaned ha kaset d'ar gêr goude-se.

Adwelet em boa Loeiz e miz Eost 1948, lorc'h a oa ennañ en e lifre soudard. Treuzfurmet e oa ar paotr penn-da-benn, cheñchet e zilhadañ ha cheñchet e zoareoù war un dro.

Ma ! Da bep hini e blanedenn. Disheñvel e oa an hent dibabet ganin, ne oan ket gwall droet war ar vicher soudard.

Dedennet e oan kentoc'h gant ar studioù skiantel, studioù am eus kaset da benn, met se 'zo un istor all.

Klevet am boa diwezhatoc'h e oa bet kaset Loeiz da vrezeliñ en Indez-Sina. Aet kuit diouzh ar vro e oan ivez, hag a-se n'em boa ket bet eus e geloù e-pad bloavezhioù.

Abegus a-walc'h e oan e-keñver an arme, klevet e veze tud oa o lavarout sotonioù evel : « A-drugarez d'o amzer-soudard e teuo ar baotred yaouank da vezañ gwazed ». Ma ! Gwazed e vijent deuet forzh penaos.

Petra a zeske ar baotred yaouank e-pad o amzer-soudard ? Kerzhout a-renk, sentiñ evel deñved, tennañ gant ar fuzuilh, ha petra all ? Soñj 'm eus c'hoazh eus ar “wazed nevez-flamm” graet o c'hoñje ganto, leizh o genoù gant gerioù ha troiennoù nevez, e yezh Molière mar plij : « *T'as pas cassé trois pattes à un canard, péquenot, espèce d'enfoiré, tiens fume c'est du belge* » ha traoù all c'hoazh ha na vefe ket dereat ober anv anezho amañ.

Desket o doa ivez butuniñ hag evañ gwin, kalz a sigarettennoù hag a win a veze roet dezho. Deuet en-dro d'ar gêr e vutune lod anezho betek daou bakad sigarettennoù bemdez.

Rastellerien

E-kerzh an hanv 1980 e oan bet betek An Treizh, d'ober ur weladenn da Charlez, ur c'henderv da Loeiz deuet da dieg goude e dad. C'hoant am boa ivez gouzout ha keloù eus Loeiz en doa bet, ul lizher en doa resevet e 1978, e Tchad e oa Loeiz d'ar mare-se, keloù ebet abaoe.

War-nes mont war e leve e oa Charlez, hag eñ intanv. Ne ouie ket c'hoazh petra a vefe graet eus douaroù An Treizh

war e lerc'h, hini ebet eus e vugale na oa dedennet gant al labour-douar.

Cheñch a ra an traoù, war ar maez koulz hag er c'hêrioù. Gouzout a rit sur a-walc'h penaos e oa an traoù war ar maez n'eus ket keit-se.

An hentoù da skouer, liammet eo an dud gant an hentoù, gwazied ar vro a zo anezho.

A bep seurt hentoù a zo hervez an implij a veze graet anezho : hentoù teret, strizh pe strishoc'h, hag a liamme ar c'hêriadennoù gant ar vourc'h ; hentoù meinnet a yae ar c'hirri ganto gwechall, hentoù diasur o stad ; hentoù-treuz ; karrontoù a yae an ijinennoù labour-douar ganto betek ar parkeier ; hentoù digoret er c'hoadoù...

Arabat disoñjal ar gwenodennoù, darempredet e oa bet gant Loeiz ha me an holl wenodennoù a oa war douar kumun Keruhel, ar re a-hed an aod, ar re a rede kamm-digamm e skeud ar gwez hag er c'hoadoù-med.

Rust ha diaes e oa lod anezho, a-wechoù kaledet gant an heol ha pouez-krec'h ganto, a-wechoù gleb-par-teil ha leun a fank, un doare "hentad soudard" e oa ma fell deoc'h, ur prientiñ da vicher dazont Loeiz, hep gouzout dezhañ.

Hon hent muiañ karet avat e oa hini An Treizh. Gantañ e oan bet oc'h ober ma gweladenn da Charlez ha kejet em boa ouzh ur bodad baleerien. « Emaomp o vont war droad eus Lannuon da Gameled, » en doa lavaret unan anezho din. Ul lodenn eus an hent bale-hir 34-37 e oa hent An Treizh d'ar mare-se.

Dilezet zo bet hentoù meinnet zo hag ivez an darn vrasañ eus an hentoù don a gase eus ur feurm d'egile. En arvar emañ an hentoù-se da vezañ stanket ouzh an dud, stanket gant labour an natur, da lâret eo gant ar strouezh.